

SON METIK

ha

KLOAREC KOAT AR RANNOU

War don : *Kurunen aour ha perlez an Itron Varia Remengol*

Karantez a glac'har !

I

Tud yaouanc, a Vreis-Izel didostait da glevet
Ar recit eus va daëlou ha va foaniou calet :
Me zo eur c'hloarec yaouanc a escopti Kemper
A boa choaset eur vestres en escopti Treguer.

A c'hars ar mor oun ganet en bro sant Guenole,
Ha biscoas nemet glac'har nem eus bet em bue ;
Glac'har a gwir garant sethu ma flaneden.
Planeden rust a calet da heuilla pen da ben.

Pa oan em bugaleach, va vam baour alies
A lavaret d'in : « Va mab, car a ped, ar Werc'hes
« Ped aneshi, va mabic, ped Gwerc'hes Rumingol,
« Mar e fedes a galon, biken ne ni da gol »

Potrones ma mam dener, Gwerc'hes vad Rumingol
Ped guech oc'h eus hu miret da doun me eat da gol
He pedet am eus bepred, breman araoc mervel,
E canin e meulodi d'am breudeur Breis-Izel.

Pa guimiadis dioc'h va zud pa zis pell eus ar guer,
Evit mont var ar studi em collac Landreguer,
M'em bloa pemzec vloa, me a vele dourec,
Rag evidon ne oa ken, alas !... a eureusded !...

O tostaat oc'h Landreguer e cavis eur plac'hic :
Koant vel eun ælic Doue e hanno oa Metic :
D'ar gouent a se ive, evel doun d'ar studi,
He c'halonic oa mantret kement a va hini.

« Salud deoc'h plac'h yaouanc a lavarin deshi,
« Evel d'oun oc'h ankeniet ho cuitad tud ho ti.
« Ho tornic flour em dornic laket gant garantès,
« Hag vesimp eurusoc'h o vela assambles. »

Ar plac'hic a lavaras : « O cloarec Guenole,
« PedompDoue alies an eil evit eguile
« Er joa couls hag en anken d'alc'hit sonj a Vetic
« Eus a vremen da viken me eo ho mestresic

« — O Metikic va c'harante, rosen ker Breis-Izel !
« War ho mignon Guenole tolet breman eur zel,
« Eur zell digant ho lagad a raf-eurusted
« Keit a ma leso Doue ac'hanan var ar bed. »

Eru en kaer Landreguer, erru e pen hon hent.
Me oe casset d'ar golach, ha Metic d'ar gouent ;
An disparti oa calet c'huero hag ankenius,
An eurusted er bed-man n'eo ket padus !...

Dre ma chomis er golach, skeuden dous Metic kes
Eun deis, enn nos dirason he deue alies
Neuse pe len Doue ha sent cos Breis-Izel,
Vit ma vije en e bue, laouen evureus santel

II

Pa eo echu va studi en his da Rumingol,
Da bedi c'hoas evit hi gwerc'hes vad *remed holl*
Seis tro a ris d'an oter, devez ar pardoun bras,
Ha seis tro d'an ilis sacr var ben ma daoulin noas.

Goude an offeren bred, o pebeus levenes !...
Er vered gant he mam gaer e velis Metic kes
Laouen ei evel an deis ha coant evel al loar
Biscoas penneres ken coant n'eus bet var an douar

Lugerni a re he zal he siou chod gwen ha ru,
He geno vel eur rosen, he bleo, he lagad du,
Eur groas aour en he c'herc'hen, he c'hoef denteleset
Lavaret vije eun æl eus an env diskennet.

« O pebeus joa evidomp va c'hloarec Guenole,
« En 'm gaout en Rumingol deis pardon mam Doue
« Mami en holl dud ankeniet, Guenole ma mignon,
« Evidom e peb amzer e fedis a galon.

« — Metic coant, setu aman eur walen aour,
« A roas din araog mervel, Anaic va mam baour,
« Doug anesi var da vis, kemer hi digant hen,
« Me dou war goalen ma mam d'es caret da viken

« Ar groas aour so em c'herc'hen a vo dit Guenole
« Eur guchen eus va bleo a joan did ive ;
« War ar groas e touan ha dirag ar Verc'hes
« E vit caret gant Metic tre ma vo en bues. »

Ha daounilet en ilis, hon deus gret eur beden,
A roet evit offrans eur c'houris koar melen,
Beniget ho medalen, poket da relegou,
Da relegou Sant-Briec caret gant hon tadou.

our.

Goude hon eus baleet hon daou dre Breis-Izel,
Ho guelel cals ilisou ; cals a douriou uhel,
Abatti Landevennec, ha mor Douarnenez
Lec'h ma oa qer Is hag or princes Ahes.

Gwelet hon eus menes-hom ag ilis veur Kemper
Mene-bre, ilis Bulat ag hini Landreger,
Kastel-Brest Sant-Yan ar Bis, ilis Salaun-ar-Foll
A kaera tour so er bed, tour uhel Castel-Pol

Gwelet hon eus Keraes, Kemperle Pon n'Abat,
Fouenan bro ar merc'hed coant, Gwengamp a Huelgoat
Montroules a Lannhuon, Crozon a Lesneven,
Callac, Bro ar gourino, Castellin, Rosporden.

Clevet hon eus e crosal ar mor e beg ar ras
Biscoas den n'antreas eb aoun pe c'hlas,
Bet omp en enes Sizun, en Roueseas Molenes,
En enes Vas, er leoded, ive er Seis-Enes.

Eur bloaves omp bet eurus evel aled Doue,
A setu lec'h pa o guelel an oll o lavaret ;
« Setu cloarec ar ranou soun evel eur derven,
« Setu Metic, e vestres, fresq evel eur rosen. »

III

Deves pardon Sant-Herbot, e clevis eur c'helou
En eus beuset ma c'halon en eur mor a zaelou.
Gant e zad ha gant he mam d'am mestresic Metic
E oa choaset da bried eur Pagan pinvidic.

Ar pagant se oa diot hep furnes, hep skiant,
Ne gare war an douar nemet ar gwin ardant
Metic paour pa e gouele a grenz gant aneres,
Hogen, e zud oa dallet allas ! gant an danves !

Mont a ris prim de gouelet neuse da Gerzanton,
Dre ma tostaen em c'hreis a grene ma c'halon ;
War dachen ar bourc e son e oa ar biniou
Tud an eured a metic beuset en e dælou.

Metic a dreus e dælou a reas ousin eur zel
En eur lavaret : courach ma mignon fidel !
Monet a ra d'an ilis lavaret ra d'ar belec :
Guenole eo a garan hag hen vo va fried !

Couesa ra-se d'an douar ractal ar benneres
Ha douget e dioc'h-tu eus an ilis e-mes.
Dispac e c'hoef, e dillad ha dispac e bleo ;
Seblantout a ra besa eun aelic paour maro.

Mantrel oll gant ar glac'har e couesis d'an daoulin
En eur grial : O Metic zel a drue ousin ?
Pocat a ris d'he dornic d'he diou chod, d'he c'herc'hen,
O Metic ! Metic ! Metic ! pehini a garan.

An disesper en dro din, evel eur vantel blom,
A gassas pell ac'hanon, pell war su mene-hom
Va skiant a so collet va c'halon a so ien,
O Metic ! Metic ! Metic ! pehini a garan.

Eis te goude aseet e-creis coat ar rannou,
War va diou chod a rede diou feuntan a zaelou.
Pa glevis e Rumingol o son hanter nos,
E lavarais esclamet : « va Doue deoc'h bennos.

« O gwerc'hes vad Rumingol, selit ous va glac'har
« Aman oun deut da vervel breman var o touar
« Varc'hoas, pa savo an heol arc'hantet en envou
« Dindan an derven gos me a vo cavet maro !...

« O Metic, va dousic coant, pehini a garan,
« Kenavo laran d'id er bedman da viken.

« Gant ar maro unanet ni c'hoas en 'm garo,
« Kenavo er barados, kenavo ! kenavo ! ! !...

IV

An de varlec'h da sav heol, eun durzunel hep par,
A hirvoude'en derven he c'hlemmou a glac'har ;
Ar c'hloarec a oa maro allas gant an anken
En eur lavaret *Metic ! te pehini a garan !*

Ar c'hloarec yaouanc a starde c'hoas he vusellou
Croas aour a bleo du Metic glebiet gant e zaelou
War an derven doa skrivet ano e garante,
An diou galon unanet treuset gant eur c'hleve,

Caset oa bet ar c'hloarec du vered Rumingol,
Ha sebeliet e disheol ilis sacr Remed oll !
Illis patrones e vam e deus bet ken caret,
Tud yaouanc a Vreiz-Izel, pedit vithan bepred.

Sethu eta Guenole en e vele douar !!!
Eur mis goude eo clevet huanadou glac'har...
Eur plac'hic guisket en da en bered Rumingol,
Dond di da bedi Doue a guerc'hes Remed holl.

O tremen dre ar vered, velas var eur men-be,
Skrivet neve flam hano e mignoun Guenole,
E-pad an nos daoulinet, Metic vele dourec,
Ha d'ar med be e poke, e poke calonec.

« O Guenole emeshi, setu te en repos
« En douar sacr Rumingol, es out deut d'am gortos
« Me ken ma straco an de o ma muia caret.
« Er be man, dre zorn Doue ni veso unanet !!!

Da sav eol, eur belec cos, vond da bedi Doue,
He c'havas anter varo gouarveet var ar men-be ;
Rei a reas d'ar plac'hic paour absolver a pardoun
Metic varvas laouen ractal gant ran galon...

En eur vogeden esans ene guen Metic kes,
Vel eur goulmic a nijas d'an Env gant an aëles ;
Eus a varados Doue eur goabren arc'hantet
Var Tour ilis Rumingol, neuse so diskennet.

Var ar goabren ar Verc'hes a sent cos Breis-Izel
Deus curunen Guenole, ag e vestres santel
Barsed an amser guechall drant var o zeleannou
Da Zoue en brezonec e gane o gwersiou.

Sebeliet e corf Metic, kichen coat Guenole,
Ar mato deus unanet an eil gant egile.
Eur c'hloarec carantesus deus var o be skrivet
Ar c'homsou truesus man, gant e zaelou mesket

« Aman repos en peoc'h Kloarec coat ar Rannou
« Den a feis hag a galon, den a garie er vro ;
« En e gichen eo cousket penneres Kerzanton
« Metic an aelic Doue, maro gant ran galon !!!

O Guerc'hes vad Rumingol, setu o taou bugel
Kousket en tal oc'h ilis a dindan o c'haskel
Vel eur vam carantesus war gavel o mabic ;
C'houi dolo eves war be Guenole a Metic !!!

Kleir, ougrou Rumingol, truesus c'houi zono ;
Barzed a pelerined dælou c'houi a skuillo,
Var be Metic Guenole, pa refet ho peden,
Eur beden a garante ha carget a anken ?

Bevit en doujans Doue, tud yaouanc Breiz-Izel,
Pedit Guerc'hes Rumingol evit ma viot santel ;
Sonjit ive e Metic, sonjit e Guenole,
Bezit evel-te fidel an eil d'egile.

Yan Ar Skour.

HISTOR ADMIRABL

DEMEUS

AR BOUDEDEO

Pehini aboue maro hor Zalver, ne ra nemet bale noz ha deiz ac'hann da fin ar bed, abalamour d'an effronteri an devoa bet en andret hor Zalver Jesus-Christ, pehini, pa voa o vout d'ar maro a falvezas dezan diskuiza var e stal, hag e teuz d'en rebuti evel eur sclerlat.

Var don : GWERZ SANTEZ-ANNA

Asistanted enorabl, tostañ da glevet
Ar vues pitoyapla a voe biscoas ar bed ;
An histor zo truesus demeus ar boudedeo,
A zo nos deis o vale aboue hor Zalver maro.

Eus a tribu Neptali: a ker Jerusalem,
Voa ganet Absarius, carget a anathem ;
Dond a ra ar bed-man en amser Herodes,
A felveas masacri Jesus, Mab ar Verc'hes.

Va zad a voa eur c'halve, va mam kemeneres,
Hag a laboure en templ da ober broderes ;
Ha va c'herent am deskas da len leor al lesen,
Hag hini ar profetet ives a dra serten.

Goude e voen demeet gant va c'herent afin,
Da eur vreg fur a prudant a tribu Benjamin,
A bini 'm boa tri bugel en amser ma teuas
Aotrou Sant-Yan Badezour d'annons ar messias.

Sant-Yan a gonvertissas cals eus ar baianed
Pere voa idolaret, caledet er pec'hed ;
Dec mil den en eun deves en deveus badeet
Me, va greg, va bugale e voamp bet o velet.

Va greg a lavaras d'in : va fried emesi,
Lecomp en em vadesi, ennont e ar Messi
Ha me o respont d'esi gant eun ear direspel :
Na ni nac or bugale na vimp ket badeet.

Aben eun neubeut goude Sant-Yan voe dibennet
Dre urs roue Herodes eun den cruel meurbet,
Ha ma teuas or Zalver evit ren en e blas
Hag a ras dre ar c'hanton cals a viraclou bras.

Klevet e meus bet Jesus alies o sermon,
Hep ne meus bet profitet eus e bredication ;
Va-unan e voa presant p'en doa rassasiet
Dec mil den, gant pemp para ha goudese pesket.

Me Boudedeo maleurus a velas c'hoas souden
Jesus o ressucita Lazar, breur Madalen,
Ha gulet dibossedi cals a dud possedet,
Ha sivoas din pec'her bras, ne meus tam profitet.

Aben eun neubeut goude voe Jesus kemeret
Gant cals eus ar Judevien er jardin Olivet,
A condonnet gant Pilat da rancout da zougen
Ar groas pouner a mezus evit ar bec'herien.

Pa voe ar groas achuet, hor Zalver voe samet,
Da vond da venes Calvar da vit crusifiet
O velet an dud o redeg me gemer ma bugel.
A me o vont da dal an nor pa ie en da vervel.

Setu Jesus o tremen neuse abiou va zi
Pehini en tal va stal a deu da reposi ;
A me lavarar dean gant eur goms arrogant
Ke alesse eus va stal te zo eun den mechant.

Ganes eun desinoret gant da iffronteri
Pa o welan o reposi aman 'tal va zi ;
Kers alesse den ingrat cos, sorser miliget,
Kers alesse d'ar maro pe c'heus he merited.

Jesus a respontas d'in gant eur voues truesus :
Mont a ran da bartia, den fal den malheurus,
Me reposo gant va zad, te valeo bepred
Dre bevar c'horn ar bed-man ac'han da fin ar bed

Ia te valeo a c'han d'ar jujamant.
Hag e c'hoste deo d'am zad am velo suramant
O varni a berc'herien pere voa condonnet
Da vont d'ar flammou gries ar re just d'ar joaset

Pa glevis comsou Jesus, va c'halon vo touchet
Ha me rei va bugale eun istant d'am fried,
Ma velis ar Veronic o sec'hi bizach Jesus,
Ha chom en e mouchouer e boltred truesus.

Heb c'hellout n'em arreti e c'heullis hor Zalver.
Hag e velis va Jesus ha cals grages santel :
Ar bourrevien d'ar Verc'hes o deveus lavaret :
Setu ama an tachou ma vo o mab staget :

P'am boe gulet hor Zalver o vervel var ar groas
Ecreis etre an daou laer carget a boanniou bras,
Ha me commans va beach gant cals eus, a anken
O tond da laret adieu da gear Jerusalem.

Sonjit 'ta Bretoned pegement a c'hlac'har
En deus ar boudedeo brema var an douar !
Rankout cuitaat e gartier e vreg e vugale,
Hep kimiadi diouto evit atao bale.

Pa en devoe baleet eun nomp a vloavesiou
E erruas en Egypt pell bras demens e vro,
Eno e ma ar Mor Ru elec'h moe tremenet
Moyses gant pobl Doue hep cavout drouc ebet.

Mond a ris eus ac'hane da enesen Candi,
Elec'h emedi en noas an dud a so ennhî :
Eno e velis eun tad o troc'hi a dammou
E verc'h evit sacrilis da rei d'o doueou.

Mont a ris da Malhodo e pelec'h e zeus tud drol,
Pere a ador Doue hag an diaoulou holl ;
Pedi reont Doue da gaout prosperite
Hag an diaoul a bedont ne rai ket drouc d'ese.

Guelet e meus er Japon eur vam meurbed cruel,
Hi deuas da lasa, siwas e daou buguel
Er vro-se e permetet lasa ar vugale
Pa n'o deus ket a vara da rei d'eze.

Goude kemeris an hent da vont d'an Enesi,
D'an Americ d'an Asie ha neuse d'an Turki
Ar grages eus ar vro-se a vale d'an arme,
Hag an esac'h o deus soign demeus ar vugale.

Eno emedi ar c'his da lasa ar baotred,
Nemet unan dre famill ne ve james miret,
Be a so eur rouanes a ro comandamant
Da lasa an holl botred hep caout de nep damant

Eur ger eus ar garniol eur eur c'his drol meurbed
Rac eno an dud yaouanc pa veson eureujet,
E renco ar vreg yaouanc nos kenta e eured,
Mont da gousket gant ar Prins vid bea enoret.

Bet on ebars eur c'hoad hanvet Cisarín,
Elec'h ma c'heller bale cant leo d'an neubeuta
Hep cavet dour da eva na feunteun na rivier,
Ar pes so goal incomod da holl dud ar c'hartier.

Monet a ris c'hoas pelloc'h da gear a Vosopa
Pini so eus e divoal eur prins eus an drola :
Ur vanden chas ha merc'hed en deus evit gardou,
Ha n'en deus ken soudardet evit difen e vro.

Ac'hane 'yis da eur gear hanvet Estopet
Elec'h ma zeus serpentet ha loened vil meurbed
Zo ker teo ha corf eun den sur ma ven mesuret
O deveus d'an neubeuta daou ugent troated hed.

Er spas demeus a gant vloas es on bet o vale,
Ha me erruout adarre em bro hag em c'hontre ;
Allas ! maro voa va greg couls ha va bugale,
Ha den abet eus va bro serten n'am anavee.

Neuse e teuis da Rom ebars an Itali,
En amser-ze a oa cals a c'hlac'har enni
Guelet a ris merseria nomp bras a gristenien,
En defot na renonsent d'o feis a do lesen.

Me a vale var mor couls a var an douar,
Ha me partiel neuse evit ar Frans, bro rar ?
E Marseille, Bourdel, Paris, Niort, Naoned Lyon
Ac'hane da Vreis-Izel, da gear vrao a Raoson.

Guelet e meus Montroules ne voa nemed eur c'hoad
Ha guelet Brest ha Kemper ebars an douar prat

Ha guelet ar gear a Is en e frospérité
Hag ar gear a Lexovi a meus guelet ive.

Guelet a meus Breis-Izel en coat a menesiou,
Ma zoat evel sovajet neuse e bars er vro ;
Me a vel cals a geariou er vro-se batisset,
A ra cals a chenchamant abaoue ma zon bet.

Me vel ar gear a Raoson eur gear gaer batisset
Dol, Gwened ha Sant-Malo, Dinan hag an Naoned
Sant-Briec ha Landreger, Lannion Montroules,
Kastel-Pol ha Lesneven, ha Landerne ives.

Ar c'heariou-se meus gweled e coat hag e prajou
Pa deus d'ober va beach kenta ebars er vro ;
Setu batisset Kemper, Brest ha Recouvrens,
Kemperle Moëlan Keraes ebars en assurans

Anfin pa oan condaonet gant Doue da vale,
Me so bet 'n em gavet e-creis meur a arme
Canoliou ha fusulioù, clescou sabrennou,
Netra ne de bet capabl de rei din ar maro.

Bet oun ebars en listri a so bet perisset,
Hag an dud a voa enne a meus guelet beuset,
Ha me anvet Boudedeo n'em bije drouc ebet
Comsou Doue a renko bea accomplisset.

Condaoned e zon gantan da chom var an douar
Comprenet holl cristenien hema zo din glac'har
Va zourmanchou er bed-man biken na echuo
Ken a deui Doue da varn ar beo hag ar maro.

Ar som eus a bemp gwennec zo em godel bepred
James ganen ne seurt clenved ne deu d'em ataket
Bet on ebars ar vroioù elec'h moa ar vosen,
Hep na zeus staget ousin na clenved nag anken.

Va boutou na va dillat james na usont ket,
Dre bermission Doue a meus bet ofanset
Peder gwech a meus redet pevar c'horn arbed-ma
Ha guelet a meus ive cals chenchamant enna.

Brema e zon comanset da redez ar bemped
Hep ne don ambaraset gant dibri na cousket ;
Guelet a meus broioù zo bet holl revinet
Ha cals demeus ar geariou gant ar gurun devet.

Ne meus bet cals amser evit chom da barlant
Me a gred e ma va zreid vargore glaou ardant
Nan, ne zeus nemet Doue a elfe discleria
Ar boanniou bras a soufran kerkent ma reposan.

Pebeus maleur e din-me bea bet rebutet
Demeus a guichen va stal Jesus Salver ar bed
Pa voa o vont d'ar maro, da zond da ziscuisa
Ha me neuse dre valeur a zeuas de zisprisa.

Ema e ar maleur bras a meus var ar bed-ma,
Emon atao o vale ouspen trivec'h cant vla,
Ha c'hoas e renkan bale a-c'han da fin ar bed :
Pedit Doue evidoun ma zin d'ar joasted.